

# ITRON VARIA AR VUR

Texte composé pour le sixième centenaire de la Statue (15 Août 1895)

Musique nouvelle de Roger Abjean (1982)

*f*




Pa - tro - nez dous a Von - trou - lez, \_ I - tron Va - ri - a ar Vur, \_  
 1. Pe - bès jo - a ha le - ve - nez \_ en neñv pa oac'h \_ dou - get! \_  
 2. Pe - dit, pe - dit 'vid Breiz - l - zel, \_ bro ar feiz vir - vi - dig; \_

*p*



Mamm da Zou - e, be - préd gwer - hez, \_ di - be - hed hag \_ oll - bur; \_  
 1. War zi - was - kell an oll ê - lez \_ e pa - lez an \_ Drein - ded: \_  
 2. Ma stour - mo a - tao er bre - zel \_ e - néb tud dis - kre - dig; \_

*p*



Hi - rio, Gwer - hez oc'h bet sa - vet, \_ oc'h bet sa - vet korv hag e - ne, \_  
 1. O Mamm ga - ret, o Mamm ga - ret, \_ C'hwi 'zo merc'h d'an Tad e - ter - nel, \_  
 2. Grit ma tal - him, grit ma tal - him \_ d'ar feiz, da feiz on ta - dou koz! \_

*mf*



Dreist an oabl hag ar ste - red, sa - vet \_ e ba - ra - doz \_ Dou - e. \_  
 1. Pri - ed d'ar Spe - red San - tel, kant ha \_ mil gwech, mil gwech \_ eü - ruz! \_  
 2. Ma 'z'aim d'ho kwe - led eun deiz, eun deiz \_ e gloar ar ba - ra - doz! \_

**Patronez dous a Vontroulez, Itron Varia ar Vur,  
 Mamm da Zoue, bepréd gwerhez, dibehed hag oll-bur ;  
 Hirio, Gwerhez oc'h bet savet, oc'h bet savet korv hag ene,  
 Dreist an oabl hag ar stered, savet e baradoz Doue.**

1. Pebès joa ha levenez en neñv pa oac'h douget !  
 War ziwaskell an oll êlez e palez an Dreinded :  
 O Mamm garet, o Mamm garet, C'hwi 'zo merc'h d'an Tad eternel,  
 Pried d'ar Spered Santel, kant ha mil gwech, mil gwech eüruz !
2. Pedit, pedit 'vid Breiz-lzel, bro ar feiz virvidig ;  
 Ma stourmo atao er brezel enéb tud diskredig ;  
 Grit ma talhim, grit ma talhim d'ar feiz, da feiz on tadou koz !  
 Ma 'z'aim d'ho kweled eun deiz, eun deiz e gloar ar baradoz !

## NOTRE DAME DU MUR

*R: Douce Patronne de Morlaix, Notre-Dame du Mur,  
 Mère de Dieu, toujours Vierge, sans péché, toute pure ;  
 Aujourd'hui, Vierge, vous êtes portée, portée corps et âme,  
 Par delà le firmament et les étoiles, jusqu'au paradis de Dieu.*

1. *Quelle joie, quelle allégresse au ciel :  
 Portée sur les ailes des archanges jusqu'au palais de la Trinité.  
 O Mère chérie, o Mère chérie, vous êtes fille du Père éternel,  
 Epouse de l'Esprit-Saint, cent et mille fois, mille fois bienheureuse !*
2. *Priez pour la Bretagne, ce pays à la foi si vivante ;  
 Qu'elle reste forte dans sa lutte contre l'incroyance ;  
 Puisseons-nous garder notre foi, la foi de nos vieux pères !  
 Que nous puissions vous voir, un jour, en la gloire du paradis !*